

AR PEC'HAER.

372

War ann ton 68 : *Evit bea e gras Doue bepred...*

Ann de zo kaer, ann heol leun a splander ;
Ar bravan bleun a c'holo ar prajo :
Chetu eo deut han a c'hoantaer ,
Vel ra tud klan , gant kalz a huanado ;
Ann darzuret a zo deut da ganan
Etal ma dor da glask ma lakat gae ;
Mes netra mui na hell ma diboanian :
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pa ienn, iaouank, d'ann iliz vit pidi-
Ma flijadur a re, pep tra er bet :
Ma ine oa gwenn a bep louzdoni !
Ann amzer-ze, siouaz ! zo tremenet.
Ann estik noz a zav bepred he vouez,
He vouez ken kaer breman evel neuze ;
Hen a ra c'hoaz etal ma dor he nez :
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Diouz ar beure a zispag ar bliennio .
Ha rog ann noz ho gweler oil-wenvet !
Me evel bleun buan a dremeno !
Ia, hep dale vinn em be astennet !
Ne rann ket fors ; deuz, maro d'am c'hemer,
Lennu, pa gari, digenin ma bue !
Re hir eo bet, re hir eo ma amzer !
Klan a klemmuz bepred eo ma ine !

Vel eunn noz du teval eo ma c'halon ;
Hag em speret ne n-a mui a sklerder ;
Na de na noz n'euz a beuc'h evidon !
Glac'har, anken ha spont e peb amzer !
Glac'haret onn d'ar beure pa zavann ,
Glac'haret c'hoaz ha pa n-ann em gwele ;
Gant ma daero ma bara a c'hiebiann !
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pa ra gwall drouz ann avel d'ar goan ,
Ha ne weler ken stereden-ebet ,
Pa gorn ar mor gand he vouez euzusan ,
Kalon mab den gand ar boan zo mouget !
Trubulietoc'h meurbed eo ma c'halon !
Ar gwall amzer na drouza ket bende ;
Mes ann anken dec'h, hiric zo vidon !
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Ho ! gwasan tra ! spontuz d'ann daoulagad,
Epad ann noz eur skeud a ve gwelet !
Ma blev a zav ! pedet vidon , tud vad !
Doue ho klev, pedet vidon , pedet !

Ho ! pa hellenn wechall veldoc'h pidi !
P'hellenn laret , o ma zad ! d'am Doue !
Doue ma zad ! n'hellañ hel laret mui !
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pec'hed mezuz, vel eunn aer gonnaret ,
Ha noz ha de te a zebr ma c'halon :
Da flemm am losk, ma ine zo bepred
Evel enn tan, n'ouzonn ket pelec'h onn,
N'euz ken a beuc'h evit ma ine kez !
Evid ann diaoul m'euz losket ma Doue !
Ha poaniet onn d'alc'humad a c'houdevez :
Klan a klemmuz bepred eo ma ine !

D'ann noz larann : ha me welo warc'hoaz !
Diouz ar beure : hiric hellann tremen ,
Ha ma varvañ er stad ma onn , siouaz !
E vinn strinket enn tan vit hirviken !
Vit hirviken ! spontet eo ma spered
Dal ma sonjann er gir spouronuz-ze !
Chom enn ivern, enn tan gand ar diaouled ;
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Evid ankoat ann tan bepred paduz
D'am flijadur am euz, pep tu, redet :
Vel-se m'euz groet bue fall ha mezuz
Gant tud veldon am euz bet ho huiliet !
Mes enep d'in dirak ma daoulagad
Eunn dorn spontuz e pep lec'h a skrive :
Ann ivern zo vidout, pec'haer divad !
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pelec'h eo et ann amzer ken euruz,
Amzer, siouaz ! evidon tremenet,
Hag e vijenn d'am Doue oil-zentuz !
Ha ! ma c'halon neuze ne grene ket.
Perag eta, vit mont warlerc'h satan
Am euz troet kein da lezen Doue ?
Didan ar boez euz ar boan bonneran,
Klan a klemmuz bepred eo ma ine !

Ho ! mar galjenn gwelan ma zorfedo ,
Ha teherat vidon kalon Doue !
Ho ! mar galjenn gand eur mor a zacro
Euz ma ine gwelc'hi ar fallente !
Ar gwir vado a zo enn env hep ken ;
Mes serret eo ann env evidon-me.
Ne n-eo ket gwir ! bianan beraden
A wad Jezuz a wenno ma ine !